



AR BREZHONEG E MARC'HAD AL LABOUR E 2006

ARSELLVA AR BREZHONEG
2006-2008

Hentenn labour

E-kerzh an nevezamzer 2006 en doa graet servij Arsella Ofis ar Brezhoneg un enklask war *Ar postoù-labour hag ar brezhoneg*. Savet e oa bet ur c'houlennaoueg gant tri c'hraf pennañ :

- stad an traoù d'ar 1^{añ} a viz Genver 2006 (an niver a bostoù-labour a oa warno brezhonegerien evit implijoù hag a c'houlenn un anaoudegezh eus ar brezhoneg),
- ar pezh a c'hallfe bezañ (an niver a bostoù a vefe mat e vefe brezhonegerien warno met zo tud divrezhonek warno ; pe re eus an dud-se a heuilh ur stummadur brezhonek),
- ar pezh a c'hallo bezañ a-benn 2010 (brasjedadenn izel ha brasjedadenn uhel).


Bewech ez eo **an niver a bostoù-labour kevatal da implijoù leunamzer (KILA)** a zo bet goulennet ; kement-se a dalvez eo c'hoazh brasoc'h an niver a dud implijet, dre ma labour lod anezho darnamzer.

Kaset e oa bet ar c'houlennaoueg-se d'ur pevar c'hant framm bennak (kevredigezhioù, embregerezhioù, strollegezhioù foran, h.a.), frammoù a ouzer e enfredont pe e c'hallfent enfredañ brezhonegerien. A-benn ar fin e sav feur ar respontoù da 38,2 %, met ret eo gouzout eo bihanoc'h ar feur-se gant ar strollegezhioù foran (20,4 % a respontoù hepken) a ra tremen un drederenn eus ar frammoù goulennataet ; gant ar peurrest eus ar frammoù eo 49,4 % a respontoù a zo bet. Ha dre ma'z eus bet strivet evit kaout respontoù an holl frammoù a bouez war an dachenn-se (adsavet goulennoù dre lizher, dre bostel ha dre bellgomz) e c'hallomp lavaret eo gwirion ar sifroù a embannomp amañ.

1- 900 post-labour brezhonek e 2006


Diskuliañ a ra enklask Arsellva ar brezhoneg ez eus e 2006 **un 900 post-labour KILA bennak** a zo warno brezhonegerien evit implijoù hag a c'houlenn un anaoudegezh eus ar brezhoneg. Ar c'hartennoù amañ da-heul a laka war wel dasparzh ar postoù-se diouzh o rumm micher e tachennoù Breizh.

Dasparzh ar postoù-labour diouzh ar rumm micher ha dre zepartamant d'ar 1^{añ} a viz Genver 2006



War ar gartenn-mañ e weler da gentañ levezon diorren ar c'helenn divyezhek (a zispleg pouez dreist Penn-ar-Bed hag ar Mor-Bihan), met lodenn ar bed kevredigezhel micherelaet zo heverk en Il-ha-Gwilen, departamant m'emañ en o liesseurtañ ar postoù renablet.

Dasparzh ar postoù-labour diouzh ar rumm micher ha dre vro d'ar 1^{añ} a viz Genver 2006



Resisaet eo war ar gartenn-mañ an titouroù roet gant ar gartenn a-raok. Merzout a reer evel-se eo bro Roazhon an drede e-keñver an niver a bostoù brezhonek (goude bro Vrest ha bro Gerne). Ouzhpenn-se, n'eus nemet er vro-se ma ya ar postoù brezhonek er-maez eus ar c'helenn d'ober an hanter eus ar postoù.

Tost an tri c'hard eus ar postoù brezhonek a denn d'ar c'helenn


evel-just : nav diwar zek anezho zo postoù skolaerien pe kelennerien eil derez, hag ar peurrest zo postoù stummerien evit an oadourien, kelennerien an deskadurezh uhel pe c'hoazh skoazellerien-vamm. Rummadoù bras all a denn d'ar merañ frammoù (er bed kevredigezhel peurgetket : renerezh, sekretouriezh, kontouriezh, karget a gefridi), ar sevenadur (da lavaret eo metoù ar buheziñ sevenadurel, met tremen un drederenn eus ar postoù-se a denn d'ar yezh hec'h-unan : troerien, dastumerien, h.a.), pe c'hoazh ar mediaoù (kazetennerien, luskerien abadennoù). Anzav a rankomp koulskoude e c'hallfe ar sifroù bezañ bet ispriziet evit ar greanterezh, an artizanerezh, ar c'henwerzh hag ar yec'hed (dre ma ne c'hallomp ket priziañ an ober hiniennel war an dachenn), koulz hag evit ar melestradur foran (dre ma n'eus ket bet kalz a respontoù o tont eus ar metoù-se).

Pa glasker urzhiañ an niver a bostoù hervez tachenn labour an implijer¹ ez eo atav ar c'helenn a zeu da gentañ evel ma c'haller gortoz (75,5 %), ar sevenadur a zeu da eil (10,9 %), ar c'hleweled (6,2 %), ar strollegezhioù foran (2,5 %, met ispriziet eo sur a-walc'h) hag an embann (2,5 %).

Ha pa vefe diaes da vuzuliañ e ranker teurel evezh ouzh stabilded ar postoù brezhonek. Tost an div drederenn anezho zo postoù kelennerien er skolioù kentañ hag eil derez (war-dro 570 post) met 18% eus an dud a oa o labourat warno e miz Genver 2006 ne oant ket tiolet gant ar Stad c'hoazh. Er-maez eus ar vicher-se e chom un 320 post bennak a zo rannet etre embregerezhioù (10,4%), frammoù foran (17,6%) ha kevredigezhioù dreist-holl (72%), da lavaret eo frammoù diasur alies pa vezont dalc'het gant ar skoaziadoù a resevont.

Gant-se e c'haller brasjediñ e chom bresk un drederenn eus ar postoù brezhonek (postoù kevredigezhel ha postoù kelennerien nann-tiolet peurgetket). Ouzhpenn-se, daoust ma n'hon eus ket dastumet roadennoù resis war an tem-se, gopr an dud a labour e brezhoneg a chom alies izel a-walc'h e-keñver o live studi. Setu daou boent (stabilded ha live gopr) a ranko emdreiñ evit ma yafe war-raok marc'had al labour e brezhoneg hag evit ma teufe a-benn da zesachañ muioc'h a dud.

Sifroù sammet ar postoù-labour zo brezhonegerien warno gant ar re a c'hallfe bezañ brezhonegerien warno d'ar 1^{añ} a viz Genver 2006



¹ Da lavaret eo pa gonter post sekretour ur gevredigezh kerent er c'helenn, pe post un teknikour eus France 3 er c'hleweled, da skouer.

Estreget ar postoù-labour zo brezhonegerien warno e kaver, gant enklask an Arsellva, roadennoù war an niver a bostoù ouzhpenn a vefe talvoudus e vefe brezhonegerien warno. Diouzh ar respontoù a zo bet e vije ouzhpenn kant anezho : un 60 post bennak gant ur stummadur war ar brezhoneg pe ur raktres stummadur da nebeutañ, ha tremen ur 45 post bennak ouzhpenn hep raktres stummadur ebet.

En holl **e sav an niver a bostoù-labour a rankje bezañ brezhonek en tu all da vil** ; ha c'hoazh n'eus bet embannet netra gant metoù an deskadurezh war an niver a dud hep stummadur war ar brezhoneg hag a vefe mat dezho kaout unan, ha gouzout a reer ez eus ezhommoù bras koulskoude (d'an nebeutañ evit erlec'hiañ ar gelennerien divyezhek ehanet da skouer²).

Pemp bloaz zo ne oa nemet un 330 post-labour bennak gant ar c'helenn divyezhek, da lavaret eo ez eus bet **ur c'hresk a 78 % war an dachenn-se** (589 post zo bet kontet evit ar bloavezh skol 2005/2006). Brav a-walc'h eo an dregantad-se, pell-tre emeur bremañ eus ar 1000 post bennak a veze rakwelet d'ar mare-se evit 2006 koulskoude : ar vrasjedadenn-se a oa bet graet diwar al lakadenn e vefe ur c'hresk bloaziek keitat a 20 % gant an niver a skolidi divyezhek, hogen chomet eo dindan 10 % (+9,7 % well-wazh da bep distro-skol etre 2001 ha 2005). A-hend-all, spi bras a oa d'ar mare-se ez afe kalz an traoù war-raok war dachenn ar mediaoù brezhonek ivez ; met plas ar brezhoneg war TV Breizh zo aet war zigresk a-benn ar fin, hag ar skingomzoù kevredigezhel o deus tennet gounid eus kevratoù implij yaouank evit postoù hag a zo lakaet en arvar bremañ evit darn anezho.

2- Etre 1250 ha 1650 post-labour brezhonek e 2010 ?


Kalz diaesoc'h eo, evel-just, embann sifroù evit an niver a bostoù-labour KILA a c'hallfe bezañ brezhonegerien warno en amzer da zont. Un darn vras eus ar responderien da enklask an Arsellva n'o deus ket embannet o soñj war ar c'hrafmañ, pe peogwir e kav dezho eo diasur o dazont betek re (evit ar c'hevredigezhioù peurgetket), pe peogwir ne oa ket e kefridi ar re o deus respontet ober muioc'h eget stadañ an traoù (e bed an deskadurezh da skouer), pe peogwir ne vo ket ret gouzout brezhoneg evit ar postoù emaint e soñj krouiñ (daoust d'ar varregezh-se bezañ priziet).

An div drederenn eus ar postoù-labour bet renablet e 2006 a dalvez evit skolaerien pe kelennerien eil derez, e-giz m'eo bet gwelet uheloc'h. Daoust ma n'eus ket bet respontoù en enklask evit ar pezh a denn da zazont ar c'helenn e c'haller ober div lakadenn : ar vrasjedadenn uhel evit an niver a gelennerien e 2010 a glotfe gant ezhommoù ar pal embannet e Politikerezh yezh Rannvro Breizh evit an niver a skolidi divyezhek (20 000 a-benn 2010)³, ar vrasjedadenn izel a glotfe gant ezhommoù ur c'hresk bloaziek keitat eus an niver a skolidi divyezhek e pep hentad hag a vefe par d'ar pezh zo bet er bloavezhioù diwezhañ. Gant ar brasjedadennoù-se e c'haller klokaat roadennoù an enklask war *Ar postoù-labour hag ar brezhoneg* ha kinnig ar grafik amañ da-heul.

² Erlec'hierien divrezhonek eo a vez galvet alies, ar pezh a laka en arvar kendalc'h ar c'helenn divyezhek.

³ Ar vrasjedadenn uhel-se zo bet graet diwar disoc'hoù al lodenn *Martezeadennoù war an emdroadurioù a c'hallfe kas da 20 000 skoliad divyezhek a-benn 2010* en teuliad *An distro-skol en hentadoù kelenn divyezhek – Bloavezh 2006/2007* (Arsellva ar brezhoneg, p. 17-22).

Sifroù sammet ar postoù-labour stadet e 2006 hag ar re a c'hallje bezañ krouet ac'hann da 2010



Etre 1250 ha 1650 a bostoù-labour KILA brezhonek a c'hallje bezañ e 2010 hervez an disoc'hoù-se. Bras-kenañ eo an diforc'h etre ar vrasjedadenn izel hag ar vrasjedadenn uhel, ret eo anzav (eus tachenn ar c'heleñn e teu an diforc'h-se dreist-holl ; ma tenner ar postoù skolaerien ha kelennerien eil derez e vefe etre 115 ha 230 post-labour ouzhpenn, diouzh ar respontoù zo bet). En arvar emañ postoù zo e bed ar c'hevredigezhioù, ivez : gant an implijoù yaouank oc'h echuiñ er mare-mañ eo ret kavout doareoù da zerc'hel an implijidi bet tutaet er mod-se ha chom hep koll o skiant-prenet. Posupl eo neuze ne vefe ket ken e 2010 eus postoù-labour zo anezho e 2006 ; sikour ar galloudoù foran (rannvroioù, departamantoù) a vo a bouez bras war an dachenn-se.

3- Ledanaat ar c'hinnig labour

Dister a-walc'h e seblant bezañ plas ar vrezhonegerien c'hoazh war dachenn ar greanterezh, an artizanerezh hag ar c'henwerzh (daoust ma c'hall ar sifr bezañ bet ispriziet evel m'hon eus displeget a-raok). N'eus nemet pa vo talvoudekaet an ober gant ar brezhoneg evit skeudenn an embregerezhioù hag en darempredoù gant ar pratikoù ez aio an niver a bostoù-labour brezhonek war-raok er metoù-se.

Kentoc'h eget enfredañ brezhonegerien hag o deus barregezhioù e fell da embregerezhioù zo enfredañ tud varrek war un dachenn resis hag a oar brezhoneg

ouzhpenn. Eno emañ an dalc’h ivez. Pouezus-meurbet eo kaout brezhonegerien anezho tud varrek da labourat war un dachenn resis da gentañ.

Ar strollegezhioù foran o deus ezhommoù dezho o-unan : skoazellerien-vamm da gentañ-penn hag implijidi all ar skolioù (evit klokaat endro brezhonek ar skolioù publik ma’z eus klasoù divyezhek), met ivez brezhonegerien evit ar mediaouegoù, ar servijoù d’an dud (ober war-dro ar vugaligoù pe ar re gozh) pe c’hoazh ar c’hehentiñ. Kumunioù zo (evel **Landerne, Douarnenez, Pondi, Kemper, Roazhon, Karaez**) o deus kinniget d’o implijidi heuliañ ur stummadur dibaouez war ar brezhoneg ; hag e-touez 28 ober ar garta Ya d’ar brezhoneg er c’humunioù ez eus unan a denn d’ar stummadur-se⁴ hag unan all a denn da vrudañ ar fed e c’hall ar velestridi bezañ degemeret e brezhoneg gant ar servijoù kêr.

Danvez a zo gant bed al labour e brezhoneg da liesaat war grenn dermen eta. E miz C’hwevrer 2006 e oa bet aozet, evit ar wech kentañ, ur “foar ar micherioù” e brezhoneg evit liseidi Diwan (**Kroashent Diwan ar micherioù**) evit m’en em gavfe an dud yaouank gant oadourien hag a labour war tachennoù liesseurt.

Araokadennoù zo bet graet war dachenn ar stummañ abaoe 2002 : aet eo ar c’hinnig stummadurioù dibaouez war ar brezhoneg war-raok (krouidigezh stajoù ur sizhunvezh e Roazhon peurgetket, hag ur stummadur hir en deus kroget eno e miz Genver 2007, unan all zo gant Roudour abaoe 2005, hini Stumdi zo anezhañ abaoe 1996 ha kinniget e vez bremañ e daou lec’h). War liesaat ez a ar raktresoù stummadurioù arbennikaet e brezhoneg ivez (an temoù a denn d’ar yec’hed ha d’ar servijoù d’an dud, da vicherioù ar sevel tiez, d’ar c’hleweled, d’al labour-douar, pe c’hoazh d’an treiñ).

N’eo ket anavezet a-walc’h c’hoazh e c’hall ar brezhoneg degas fred d’an dud. Kreñvoc’h-kreñvañ eo ar youl da gas ar brezhoneg war-raok e bed al labour koulskoude. “Broudet e vo ar skolidi da vont war **micherioù brezhonek er-maez eus bed ar c’helenn** (koulz ha deskiñ brezhoneg en hentadoù teknikel)” eo kinnig testenn Politikerezh yezh Rannvro Breizh evit ar pezh a denn d’ar stummañ micherel.

War liesaat ez a ar stummadurioù war ar yezh (deskadurezh uhel, stummadurioù c’hwec’h miz, stummerezh dibaouez). Dedennañ a reont tud disheñvel, dezho holl palioù micherel avat. Raktresoù stummadurioù e brezhoneg war danvezioù nann-yezhel zo ivez, met poan o devez da zont da wir alies. Peurliesañ e talont ouzh kudennoù melestradurel pe ouzh un diouer a enskrivadurioù. Gwir eo evit bed ar yec’hed gant ar vachelouriezh vicherel SMS gant al lise Diwan, hag evit ar stummadur war ar c’hrouiñ kleweled gant Daoulagad Breizh. Arouezius eo an dra-se eus an ezhomm a zo da vrudañ gwelloc’h gwirvoud ha lusk bed al labour e brezhoneg e-touez an ensavadurioù hag er gevredigezh dre-vas.

⁴ Dibabet eo bet an ober-se gant tost ur bempvedenn eus sinerien ar garta evit ar poent.

Klozadur

Gant un 900 post-labour KILA bennak ha, gant-se, tremen ur miliad a vrezhonegerien implijet warno **e c'haller lavaret eo ar brezhoneg unan eus embregerezhioù bras Breizh**. Ha lañs zo gant an embregerezh-se, war ar marc'had, dre ma kresk buan an niver a bostoù ennañ.

Ar c'helenn eo tachenn tost an tri c'hard eus ar postoù-se evel ma c'halled ijinañ. Neoazh, metoù ar sevenadur, ar bed kevredigezhel hag ar mediaoù a laka brezhonegerien lies o barregezhioù da labourat.

En amzer da zont e kendalc'ho an niver a dud implijet gant an embregerezh "brezhoneg" da greskiñ. Splann eo e chomo bras lodenn ar c'helenn e-touez micherioù al labourerien-se met daou dra a c'hallfe degas emdroadurioù a zo diaes da briziañ c'hoazh :

➤ Eus un tu, muioc'h-mui a dud oberiant ampart war ar brezhoneg a zeuio er-maez eus an hentadoù divyezhek (pe eus ar stummadurioù evit an dud deuet), ha lod anezho gant ar c'hoant da vont war vicherioù estreget tachenn an deskadurezh.

➤ Eus un tu all, kredapl bras e vo muioc'h-mui a embregerezhioù e Breizh a verzo ar pezh a c'hall ar brezhoneg degas dezho. Un arouez a-zoare eus kalite o servijoù pe o froduioù e c'hall bezañ an divyezhegezh, koulz hag un doare aes da gadarnaat o dibarded en ur marc'had a ya war vedelaat.

Gant an daou duadur-se o c'hoari asambles gant c'hoant ar Vretoned tomm ouzh o yezh ez eus arguzennoù a laka da soñjal e c'hallfe plas ar brezhoneg (ha gant-se implij ar vrezhonegerien) mont war ziorren kalzik war pep tachenn ouzhpenn hini ar c'helenn.